



2026 – Sizhun 2

Programm Istor

	Lun	Meurzh	Merc'her	Yaou	Gwener
Mintin	Breizh a-dal ar Franked (750-907)	Klask un hent etre ar galloudoù (907-1202)	Dindan beli roue Bro-C'hall (1202-1341)	War hent ur Stad (1341-1514)	Etre pinvidigezh ha pellaat diouzh preder Pariz (1514-1789)
Pred					
Goude merenn	Breizh a-dal ar Franked (750-907)	Klask un hent etre ar galloudoù (907-1202)	Dindan beli roue Bro-C'hall (1202-1341)	War hent ur Stad (1341-1514)	Prientiñ ar filaj

Istor Breizh

-> Pal :

Ober anaoudegezh gant istor Breizh hag ober anaoudegezh gant an istor evel danvez skiantel. Ar bloaz-mañ e adpakimp ar prantad diwezhañ bet gwelet e 2025.

Gwelet a raimp peseurt darempredoù o doa an uhelidi e Breizh ouzh ar Franked, a oa oc'h astenn o galloud war ar an tiriadoù a oa gwezhall e kornôg an Impalaeriezh roman. Gwelet a raimp peseurt choazoù a oa bet graet ganto : kenlabourat, stourm a-enep. Gwelet a raimp penaos e oa bet savet ur rouantelezh ganto, dindan beli teorikel ar Franked, met gouest da enebañ e volontez outo.

Da c'houde e welimp penaos e oa bet distrujet ar rouantelezh gant aloubadegoù ar Skandinaved ha penaos e oa kouezhet Breizh dindan dalc'h ar priñselezhioù amezek (Normandi hag Añjou) a-raok bezañ adsavet, dindan aotrouniezh div familh o doa stourmet etrezo. Fin ar prantad-se a oa merket gant ar mod ma oa kresket galloud ar rouantelezhioù all, Bro-Saoz o kemer plas Normandi hag Añjou, Frañs eus an tu all.

Gwelet a raimp penaos o doa gallet rouaned Frañs staliañ o familh war Breizh da ren anezhi ha penaos o doa kollet ar priñselezh abalamour d'ar brezel Hêrezh, penaos o doa klasket ar Voñforzhed staliañ Breizh evel ur vro zizalc'h ha penaos o doa kollet ar brezel. Ar prantad da heul a ziskouezo dilerc'hioù an aloubadeg hag ar staditigezh.

Cheñch a c'hell ar programm ober diouzh peger buan ez aimp.